



Rener-ez Kreizenn Dudi

Kinnig labour embannet d'an / ar vendredi 17 juillet 2026

Lec'h : **Kreizenn dudi / Skol DIWAN - Ar Blosne ha Keryann**

Doare post **CDD** H/F

Padelezh **10 miz**

01/09/2026

Deskrivadur ar post-labour

Eurvezhioù labour

1- Tri seurt amzer labour zo er post :

Amzer er greizenn dudi (KD) :

- 8e00 - 18e00 (da lavaret eo 10 eur bemdez)

2- Amzer troskol (4 devezh er sizhun, da lavaret eo 16 eur er sizhun) :

- 12e00 - 13e30 (ehan kreisteiz)
- 16e15 - 18e45 (degemer diouzh an noz)

3- Amzer melestradurel ha merañ raktresoù (5 eur) : (roll diglok)

- Merañ an enskrivadurioù / an nulladurioù
- Merañ an teuliadoù (skoaziadoù, h.a.)
- Krouiñ obererezhioù
- Diorren ar c'henlabour gant ar frammoù divyezhek all

Kefridioù pennañ

1. Renerezh ar greizenn dudi (KD)

- Rennañ ar greizenn dudi war an dachenn bedagogel ha melestradurel
- Aozañ ha steuñviñ an obererezhioù en ur zoujañ d'ar raktres desavadurel
- Sevel, lakaat e pleustr ha priziañ ar raktres pedagogel
- Gwarantiñ surentez fizikel, emouestlel ha santimantel ar vugale degemeret
- Evezhiañ, luskañ ha kenurzhiañ skipailh an animatourien hag animatourezed
- Merañ an darempredoù gant ar familhoù hag ar gevelerien ensavadurel
- Gwiriañ e vez doujet d'ar reolennoù a zo e talvoud (feur evezhiañ, disklêriadennoù, h.a.)
- Merañ ar framm war an dachenn velestradurel ha war an dachenn arc'hant

2. Buheziñ hag evezhiañ war an amzer troskol

- Degemer hag evezhiañ ar vugale war an amzerioù troskol
- Kinnig ha buheziñ obererezhioù desavadurel azasaet ouzh oadoù ar vugale
- Gwarantiñ ar c'henstag desavadurel etre an amzer skol hag an amzerioù dudi
- Kemer perzh e emvodoù ar skipailh hag er c'henbrezeg pedagogel gant renerezh ar skol

3. Talvoudekaat ar brezhoneg hag ar sevenadur breton

- Brudañ hag enframmañ ar brezhoneg en obererezhioù hag e buhez pemdeziek ar skol
- Kehentiñ e brezhoneg gant ar vugale, ar familhoù hag ar gevelerien pa vez posupl
- Kemer perzh e kreñvaat identelezh sevenadurel breizhad ar skol

Skiant-prenet ha barrezhioù goulennet

Barregezhioù rekis

1- Barregezhioù teknikel :

- Anaoudegezh vat eus reolennoù an ACM (degemerioù a-stroll evit bugale ha yaouankiz)
- Barregezh da verañ ur raktres pedagogel
- Anaoudegezh eus an teknikoù buheziñ azasaet ouzh ar publikoù disheñvel
- Mestroniañ an ostilhoù burevek diazez

2- Barregezhioù yezhel :

- Mestroniañ ar brezhoneg dre gomz ha dre skrid
- Mestroniañ ar galleg

3- Perzhioù personel :

- Skiant ar c'hargoù hag an aozañ
- Barregezh da verañ ha da labourat a-skipailh
- Aezamant en darempredoù gant ar vugale, ar familhoù hag ar gevelerien
- Barregezh da azasaat ha da respont buan
- Krouidigezh ha startijenn

Diplomoù ha perzhioù-micher rekis

- BPJEPS LTP (Dudioù evit an holl publikoù) pe BAFD pe un diplom kevatal : Rekis
- Testeni pe barregezh e brezhoneg (brezhoneger·ez) : Rekis
- PSC1 pe un testeni sikour kentañ kevatal : Hetadus

Doareoù ar post

- Kontrad pad termenet (CDD)
- 31 eur er sizhun, bloazekaet
- Labour war 5 devezh
- Gopr hervez ar c'henemglev stroll a dalvez hag an skiant-prenet (14 euro/e minimum)

Emdroadurioù posupl

- Digeriñ ar greizenn e-pad vakañsoù ar skol

Lakaat hoc'h anv

- rh@diwanbroroazhon.bzh

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://www.diwan.bzh/br/offres-emplois/directeur-rice-de-centre-de-loisirs-rener-ez-kreizenn-dudi-170720261921>